

AR BASION VRAS (adoazet diwar testennoù koz)

Kor.

Mari,Mari emen (pelec'h) e oac'h
Pa 'z eo aet ho mab diganeoc'h

Mari

E-barz ma c'hamb' 'oan o pedin
Aze ne oa nikun ganin (bis)
Pa 'z eo aet ma mab diganin.
Sant Yann,Sant Yarn,kenderv Jezuz
Bezit ouzin madelezus,
Ha deuit ganin da vale,
Eomp da gavout Mab Doue.

Kor

Pa oent war raok war ar rafved
Tri mab yaouank o deus kavet (bis)
Eur salud dioute resevet

Mari.

Tri mab yaouank,d'ân lavaret,
Eus men teuit,emen oc'h aet ?
Tri mab yaouank
Bet omp da lann ar Groaznevez,
D'welet sevel eur groaz nevez (bis)
'Vit krusifia Mab Doue

Kor

Mari,Mari,ha pa glevas,
Teir gwech d'an douar a simplas.
'eir gwech d'an douar oe semplet,
'N tri mab yaouank 'deus hi savet.

Mari.

Tri mab yaouank,d'in lavaret,
Emen eman 'n hent da vonet ?
An tri mab
Heuilhet aze al lannegou,

C'houi glevo trouz ar mozoliou (bis)
O skei war bennou an tachou,
An tachou dir,ar re houarn,
E treid Jezuz ha 'n e zaouarn

Kor

Ne oa ken Mari 'vit tostaat,
Ken 'oa daelou 'n he daoulagad
An tri mab

Pa oe erru ouz troad ar groaz,
Teir fazenn er skeul e pignas

Kor

Teir fazenn er skeul e pignas;
Ar vourevien ganti 'skoas

Mari

Boureo,bez mat,Boureo,bez mat;
Da roin c'hoaz eur pok d'am mab.

Jezuz

Sant Yann,sant Yann,ma c'henderv ker,
Kasit ma mamm betek ar gêr,
Kasit-hi d'ar gêr da ouela,
'Chomin war ar groaz da sec'ha.

War an douar ha gwadet kaer,
Dalit ma mamm ma mouchouer (bis)
Kasit-hen ganeoc'h bete 'r gêr.

Kor

Kasit-hen ganeoc'h en ho ti,
Ha n'it ket evit hen gwalc'hi.
N'it ket d'ar waz-dour na d'ar stang,
Bout 'z eus ebarz seiz sakramant

An tri mab

Bout 'z eus e-barz seiz sakramant,
An nouenn hag ar vadeziant,
Ar vadeziant hag an nouenn,
Hag a zo ret da bep kristen

Kor

N'hen kannit ket gant an dour-red
Ar gwad a gann pec'hed ar bed

Gouarnou

- 1) Roit gerioù henvelster gant "Emen",eus men,ranved,stang,gwaz+dour
- 2) Petra 'c'hellomp c'hoaz lavarout evit "da roin c'hoaz","Bout ez eus"
- 3) Perak nec'hellomp ket lavarout:"Bout 'zo ebarz seiz sakramant..".Daoust ma z eo reiz an troiou-lavar-man:"Pell'zo,Kalz'zo,Dek'zo deuet".
- 4) Hag ez eus eun diforc'h bennak a ster hag a implij etre ganin ha diganin, war ha diwar,ouz ha diouz;roit skouerioù.
- 5) Hag e vez reiz skriva:"Teir fazenn e pignas".Ha ne vefe ket "pignat" eur verb oberiat ?
- 6) Lec'h ar ragano-gour gant an doare-gourc'hemenn.Pe stumm eus ar ragano-gour a zo lakaet araok ar verb,pe stumm drek ar verb.Hag e vereiz lavarout "O c'hasit d'in","Her c'hredit mat" ?
- 7) Hag ez eus hevelep ster gant "Dalit" ha dalc'hit .
pennad dasevel.

Hag e vefe ar c'hoariva eun adtaolenna dirak sellerien,ar gwiriona ar gwella,eun dra dremenet,hep derc'hel kont deus ar sellerien.Pe eun doare prezegenn,pe kan diskleriet d'an dud,d'ezo da c'hoari war an danvez,ar penna C'hoarierien ez int.Neuze e tle beza graet an arvest diouto,ha n'eo ket diouz ar gwirion. Hag e vefe ar pennad-man c'hoarivael er ster-se ? Roit